

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

126. AN INTAON

( follenn 104 )

Me o suppli, tud iacouank, couls potret a merhet,  
Dieu<sup>e</sup> an entretienco divoalit me o ped  
Rag a kement zo forchet er bed man neus was tra  
evid an antretien, divoalit neb a ra

Divar va c'houst va hunan e c'houzon kement-se  
Rag an amzer tremenet siwas a meus gret re.  
a breman en amzer bresant meus poan a chagrin  
o klasq e neum divuilla deus al lec'h ma fell din.

Deus a kement antretiennou a meus gred dre ma zeen  
ne meus klac'har da hini evel a meus da hunan.  
A balamour d'eur plac'h iacouank a zo gane ambuzet,  
chonj dizi a c'hoarvezo ar pez ne reio ked.

Bez a zeus, plac'het iacouank ag a zo ignorant  
breman teuont re vuen da gonta ho santimant.  
Da tud e parlant gato, a seblant dezo o c'har  
Ag abars fin an amzer int o deveus klahar.

Mo karvoc'h, merhet iacouank, deffarc'h ked re vuan  
Da gonta ho santimant evel se da (bed)<sup>o</sup> hunant <sup>e=bep</sup>  
c'houi a ve goel estimet, muioc'h a honor o pe  
evid no c'heus o konta o toare er c'his se

Ar sounn man zo kompozet gant eun den dissouci  
an deus nebeut a speret a nebeut a studi  
ag an deus hi kompozet da passeal e amzer  
a da gement er goulen mar gell e chervicher.

~~~~~  
vvvvvvvvvv

Katarin, deus a Laninor 3 mars 1851

~~~~~  
vvvvvvvvvvvvvvvvvvvvvv